

DIOU VOJENN

oet en brezoneg diwar ar c'hemraeg) (1)

Uhel, galloudus eo an derwen grenv, ab
Oc'h astenn gand lorc'h he brec'hiou en Neny;
Hi eo ar brasa e touez gwe ar c'hoat, i reginniv
Mez daoust hag eo better chizze dalc'h-mad?

Oh nan ! Bet ec'h eo euf ween vihan
A greskaz a-dreuz d'ar stourm, d'an taran,
Mez hirio e c'hall sonn en em derc'hel,
Trec'hi war gouad diroll en awel.

Diskomp dre vojenn an derv galloudus
Ec'h eo red stourmi a-benn dond nerzus.

II.

Al lili 'zo koant en penn e gorzen,
Peb-unan d'e wel en em gav laouen ;
Mez koulskoude gwan e seblant beza,
An awel a zeuy prestik da folla !...

Penôz 'ta e ra pa zeu ar stourmou
Da c'houeza garo a-dreuz d'e zeillou ?
Plega ra e benn 'rag an awel grenv,
Ha p'e tremenet e sav c'hoaz d'an Nenv.

Diskomp dre vojenn al liliik gwenn
Trec'hi, 'barz ar gann, 'n eur blega hon fenn.

Gazeten Cymru'r Plant, mis du 1897.

F. JAFFRENNOU.